

ANVIOÙ HON LEC'HIOÙ (4)

I

Etnonimoù, da lâret eo anvioù keneloù kozh, sed aze ur rummad anvioù aet gant un nebeud kêrioù bras en Breizh. Kêrioù hag o devoa bet bep a anv keltiek all ivez, hep bezañ etnonimoù. Ur wezh c'hoazh merkerioù hon istor, hon istor koshañ da vat. Un istor hag a gas d'ar mare keltiek ma ne oa ket deuet ar Vretoned er vro da vat. A-raok ha goude en em staliañ en lodenn gornaoueg Arvorig kozh e ouveze ar Vretoned ober eus Mor-Breizh ur pezh gourhent mont-dont dizehan. Un istor yezhel hag a lak ivez penaos e oa tost ar galianeg en aodoù-se d'ar predeneg en aodoù all. An div yezh en em vage etreze en un doare naturel : an eskemmoù ekonomikel (ha sevenadurel), a-gozh, a oa pouezus, dreist-holl reoù evel an holen pe c'hoazh ar staen. Galianeg Arvorig ne oa ket galianeg Marsilha pe se, anat. En soñj an dud e oa ar galianeg ur yezh unvan, ar pezh ne oa ket ! Sparadrap gourbegus meizad statud ar galleg divarvel en empennoù trevadennet... gant ar skol.

Al linennoù da heul zo harpet, evit ul lod, war pennad diziouerus Leon Fleuriot (1981), hon Leon Fleuriot ar c'heltiegour meur. Ha pa n'em eus ket c'hoant da ober poan da *followers* feal ar chaloni Falc'hun, ne rin tamm anv eus e labourioù.

Gwened. *Gwened*, stumm brezhoneg *Vannes* herie (met *Vennes* gwezhall, n'eus ket re bell), zo hag anv ar gêr hag anv ar vro. Merkit mat eo Bro-Wened ar vro nemeti a-c'haoliad etre Breizh-Izel ha Breizh-Uhel... Fentus gwelet an etimologiezh pobl : *gwenn* + *ed* ! En gwironez e teu eus un etnonim tremen anavezet : *Ueneti* (*Οὐενετοί*, *Uenetes* hervez an testenioù kozh). Bezañ eo un etnonim adkavet en norzh da Italia, *Venezia*, merker modern eus anv ar *Venetes* en aod mor an Adriatik, met ivez un anv ken bev all en norzh Kembre, *Gwynedd*, deuet eus *Uenedotia*, and so on ! Met ma n'eus ket eus liv *gwenn* an *ed*, eus pelec'h e teu an anvioù-se eta ?

Stummet eo *Ueneti* war ur wrizienn indezeuropek **wen-* « c'hoantaat » testeniekaet ivez el latin *uenus*, *Venus*, an henalamaneg uhel *wini* « keneil », *wunskan* « c'hoantaat », etc. Evit a sell ar c'heltieg e tostaer ar wrizienn-se d'an heniwerzhoneg *fine* « family, kindred ; progeny, descendants, clan, tribe, race », d'ar c'hrennvrezhoneg ha d'ar brezhoneg modern *gouenn*, diwar an henvrezhoneg *co-guenou* gl. « indegena », hag ivez d'ar c'hembraeg *gwên* « mousc'hoarzh », *gweni* « mousc'hoarzhin », d'an elfenn *gwen-* a gaver er brezhoneg modern *gwenc'hoarzh* « mousc'hoarzh », testeniekaet sklaer en Bro-Wened, just a-walc'h.

Ha brud ar gwenedeg eta ? Ur brud a-gozh bezañ, n'eo ket disheñvel, met gant e verkoù, evel m'en ro Buhez Gwenole (1580) da c'hoût er gwerzennoù 671sq. : *Na dre pedeñ ne effen en lateñ a Vennet / Quemant den az sento a bezo mezequaet*, « Et je ne saurais pas de prière dans ton langage de Vannes / Tout homme qui t'obéira sera honni ». Moarvat barn unan na oa ket eus Bro-Wened !

Ma klasker reiñ un droidigezh d'an etnonim *Gwened* e c'haller kinnig « ar reoù c'hoantaet ; an dud hegarat ».

Darioritum evit *Darioriton* « ar roudouz drouk, trubuilhus pe al lavroudouz » zo soñjet evit bezañ an henanv d'ar gêr a vo hon *Gwened* diwezhatoc'h. An eil elfenn, anavezet mat, zo *ritu-* « roudouz » gant ur rakger *dario-* anavezet dre ar ger brezhoneg *kounnar* (diwar **koun-dar* « fulor (par da hini ar c'hi) »).

Ereg. E vije bet eus *Ereg*, evel roue en Bro-Wened, gant un anv diwar *Uuaroc* pe *Uueroc* ha goude *Gueroc* ha *Guerec*, ne vern evit hon c'haoz amañ. Bezet a vezo ur vro gant e anv zo testeniekaet en IX-Xvet kantved, en Kartular Redon (diwar Wikipedia) : *Brooueroch* (830, 840, 842, 868), *Brouueroch* (836-849, 851), *Brouuerec* (834), *Brouueroec* (846), *provincia Uuarrochia* (878), *patria Gueroci* (909), *Brouuerec* (goude ar bloaz 1000).

E-pad ur prantad hir zo bet un *Nor Broërec* en ramparzhioù an Henbont (testeniekaet evel-se en 1590). Sede e oa ur vro anvet *Bro-Ereg* hag a zo bet evel ur gwiskad all war an anv *Bro-Wened*.

André-Yves Bourguès en deus marteze kavet ar roud anezhañ en un anv-lec'h en Lokmaria-Kaer :

Kerguerec, skrivet evel-se en kadastr kozh mare Napoleon. Ret e vefe goût petra eo an distagadur evit

gwir : **Kerwereg* ? **Kergereg* ? Notennet e vo ivez en penn all Lokmaria ur *C'hoët er roue*, skrivet *Coët er rouis* er c'hadastr kozh ivez, hag a ro distagadur gwirion ar vro, war bouez an -s dibenn da ober brav, moarvat (nemet e vefe evit *ar wiz* ?). Piv ar roue-se ? Hon Ereg ?

Bremañ, en tu-hont d'an istor, hon *Ereg* en deus lezet e roudoù er mojennoù. Met n'int ket mojennoù ken boutin a se ! Rachel Bromwich, a raed "rouanez ar studi keltiek" anezhi, he devoa savet ur studiadenn a-bouez bras diwar-benn *ar mojennoù a roueelezh*, stank daonet en henlennegzh Iwerzhon. Ha bev ivez en hon mojennerzh, tremenet dre hentoù sebedennus, a-wezhioù. Sede penaos e oa eztaolet splann gant hon Arzel Even, arguzerezh hon Rachel : « Ar mojennoù-se, stank en henlennegzh Iwerzhon, a veze enno ur vaouez oc'h aroueziañ ar vro, hag an hini a zimez dezhi pe en em bar ganti (pe zoken, e mojennoù zo, a bok dezhi) a zeu da vezañ roue ha tad ur rummad roueed. A-wechoù ez eo ar vaouez un *doueez-anverez* (*eponim*), a zoug anv ar vro, evel *Eriu*, *Banba* ha *Fotla*, gwragez an tri roue gourvibien Dagda. Darvoudoù all a c'heller kavout ivez en danevell, a-unan pe asambles, hag an istor klok a hañval bezañ evel-henn : an haroz a ya d'an emholc'h ; heuliañ ha lazhañ a ra ul loen, peurliesañ ur c'harv gwenn ; deut ar sec'hed warnañ, e klask ur feunteun ; an hini a gav a zo diwallet gant ur wrac'h euzhus, a nac'h reiñ dour dezhañ anez e kousk ganti (pe e pok dezhi). Asantiñ a ra, hag ar wrac'h a dro raktal d'ur vaouez yaouank kaer a bromet dezhañ ar roueelezh. Anavezet eo bet seurt mojennoù e Breizh, gouez d'an it. Bromwich. Unan anezho a zo bet mammenn romant brudet Chrestien a d-Troyes, *Erec et Enide*, damheñvel ouzh *mabinogi* Gereint hag Enid. Dizoloet e oa bet pell zo e oa *Erec* ar brezhoneg-krenn *Guerec*, abretoc'h *Uueroc*, anv ar pennbrezelour hantervojenel, diazezour rouantelezh Wened, ha douget ivez gant meur a hini eus e warlerc'hidi ; ha kredet e veze peurliesañ e oa bet savet romant Chrestien diwar un danevell vreizhek amprestet digant Kembreiz, gant anv un den-meur a Vreizh-Vihan lakaet e-lec'h an anv damheñvel *Gereint*, dianav du-mañ. Met kevrinus e chome anv ar plac'h *Enid*, hag amañ he deus an it. Bromwich diskouezet hec'h ijin : evel ma teu *Erec* diwar *Bro-(W)erec*, e teu *Enid* diwar *Bro-(W)ened*. Hi eo doueez-anverez ar vro, ha Gwereg, en ur zimeziñ ganti, a c'hounez ar rouantelezh evitañ e-unan hag evit e ziskennidi (kurunennet eo Erec hag Enid e Naoned e diwezh an istor, met sur a -walc'h en danevell-orin e oa e Gwened). Temoù ar c'harv gwenn hag ar wrac'h a gaver roudoù anezho en *Erec*, hag i gwall-zisleberet. Ret eo gant-se goulakaat ez eo aet an danevell a Vreizh da Gembre, ha n'eo ket ar c'hontrol ; e-lec'h un den-meur breizhat dianav e anv dezho o deus Kembreiz lakaet an danevell war gont Gereint, roue Kernev-Veur, a zo bet skrivet e varvnad e kembraeg e *Levr Du Caerfyrddin*. »

Bep a aferez evit un dimeziñ mojennel !

Ereg zo diwar ur wrizienn **viro*- en devoa roet ar brezhoneg *gour* « paotr, den, gour », ar c'hembraeg *gŵr*, an iwerzhoneg *fer*, heñvel o ster ivez. *Uuaroc* pe *Uueroc*, gwelloc'h, en devoa miret ar vogalenn abalamour d'ar pouezmouezh koublet gant liv ar vogalenn-se. Bezañ e c'hallfemp treiñ an anv « ar gour meur », un anv roueel...

Herve Bihan

Levrlennadur

[roet e vo al levrlennadur en dibenn al lodenn II]